

# TRUGAREKAAT AR STRIVOÙ

**Beaudouin Vercken a anaveze Erwan Le Mene, a anaveze Vianney ha Luc... Un afer a vignoniezh etre 4 faotr yaouank, o chom pell aneilouzh egilemet liammet gant an embregerezh emaint o paouez sevel, ar SAS Ecotree, bet savet e 2015.**

Disheñvel-mat eo barregezh ar pevar mignon, Beaudouin war-dro ar c'hehentiñ, Vianney evit mestroni ar c'hoadegoù, Luc evit ar gwerzh, Erwan evit ar merañ. Gant ar start-up Eco-Tree e fell dezho trugarekaat ar re a stourm evit an endro. "Re alies e kasont da benn oberennoù a dalvoudegezh evit an endro, e paeont ker(oc'h) evit lakaat o ober da glotañ gant o mennozhioù ha n'int ket trugarekaet." eme Beaudouin Vercken.

Kinnig a reont d'an dud prenañ gwez yaouank 4 bloaz bennak da 15€. Evel-se e sikouront merañ arc'hoadegoù, ec'hellont gounid un tamm arc'hant dre ma kresko o gwezenn ha neuze o gounid, hag e viront ouzh kas CO<sub>2</sub> en aer.

## Koadeier Breizh

E 2014, gant o arc'hant, o doa prenet 4 devezh-arat douaroù, gwez sitka warno, e Logivi Plougras. D'an 8 a viz Kerzu 2015 e werzhent o gwez kentañ. Bez' e c'hell o fratikoù gouzout pehini eo ar wezenn o deus prenet, pelec'h emañ-hi, resis, dre ma vez-hi geolec'hiet. 136 gwezenn o deus gwerzhet evit poent ha lakaet ar brenerien da arboellañ 662 234 gr CO<sub>2</sub>. Met dav eo lâret e cheñch ar sifr-mañ ingal dre ma vev ar gwez. Goude zo deuet tud, Finistere



Skipailh Eco Tree gant Emmanuel Macron

Angels o anv, da bostiñ arc'hant en o SAS ha dre se da sikour anezho da greskiñ. Gallet o deus prenet 30 devezh-arat e Ploure ha kement all e Langoelan e miz C'hwevrer 2016. Bez' o deus betek hanter miz Ebrel evit kempenn an

tachennoù, plantañ gwez m'eo ret, kompezañ lec'h pe lec'h. Adkregiñ a raint ganti e miz Du.

## War-zu ar stalioù

Ne ra Eco-Tree nemet kregiñ. C'hoant o dije ar pevar mignon

mont pelloc'h dre lakaat an aozadurioù a denn gounid eus emzalc'h poellek an ekologourien d'en em ouestlañ en o afer.

Fellout a ra dezho krouiñ un espern "glas" ha dre se, gwellaat stad koadoù Breizh ha reoù Bro-C'hall.

Evit se e kontont kalz war o energiezh, war o lec'hienn internet, war ar c'hoant a zo gant an dud d'ober un dra bennak fetis evit an endro. Tizhout 4000 gwezenn evit fin ar bloaz eo ar pal kentañ. Hag an eil, 'benn 5 bloaz, merañ 200 000 anezho, 3 milion a euroioù ha 12 goprad. "Pa ouzer e c'hell ur wezenn pakañ 10kg CO<sub>2</sub> ar bloaz hag e vez produet 6 gwech muioc'h gant ur veaj Londrez-Pariz, e komprenet pegen talvoudus eo merañ mat koadeier hor bro." a gloz Beaudouin Vercken.